

# LIZER.

AN

Otro 'n-Eskob Sant-Brieg ha Landreger

*D'ar Veleien ha d'ar Gristenien eus e Eskopti*

**HA GOURC'HEMENNOU AR C'HOAREIZ**

Evit ar blavez 1929 goude Donedigez Hon Salver

---

**Doze a zalc'h en e sav hag a ren ar bed**

---

FRANÇOIS-JEAN-MARIE SERRAND

Dre drugare Doze ha beli Hon Tad Santel ar Pab,  
Eskob Sant-Brieg ha Landreger.

D'AR VELEIEN HA D'AR GRISTENIEN EUS HON ESKOPTI

*Peuc'h ha bennoz a-beurz Jezus-Krist, Hon Otro*

---

HON BREUDEUR KER,

Eun Doze a zo, da lavarout eo, e zo unan benag hag an neus bet a-viskoaz ar vue dreizan e-unan, unan benag holl-c'halloudek hag eman ennan an holl berfeksionou, hep koulzkoade, e vefe dishenvel ennan ar perfeksionou-ze an eil diouz eben, unan benag hag ac'h ê ret d'ar spered kemer warnan e ziaze evit kompren ar bed hag ar pezh a zo oc'h ober ar bed, hag a zo hanvet, dre-ze, perc'hen holl-c'halloudek ha mestr an holl dreou.

Plegan d'ean na n'eo nemet senti ouz turnez ar skiant vat à ro d'imp da c'houzout sklêr evel an de e zo eun Doue. Nac'h ar wirione-ze, a zo, herve komz ar Roue David (1), bean diboell, ha diskoe nebeud kaer a spered, peogwir e kouzanter 'n em skei da wiken hep golo e kreiz an denvalijen, ha kondaoni ar spered, ma kar klask kompren eus pelec'h e teu ar bed ha penoz ec'h è bet gret, da gouean eus an eil sonj diskiant ebarz egile. Setu aze ar wirione, diaze an holl wirioneou, am eus displeget dirazoc'h em lizer a C'hoareiz bean zo daou vla.

Siouaz! an den n'eo ket hepken eur spered evel eun êl; bean an neus, e-tuont, eur c'horf, evel al loened, ha c'hoantou ar c'horf na gordont ket dalc'hmat gant lezen ar spered. Re alies e teu eus ar c'horf eun ezen fall da dallan ar spered ha da harz anean da vont war eün gant e hent. Lavaret hon deus se, pa hon deus disklêriet e zo eun Doue. Met kaer hon deus lakât ar wirione-man e kreiz eur sklêrijen skedus, klemmaden ar c'horf dindan bec'h ar poaniou a led eur goumoulen du war ar sklêrijen-ze, hag ar spered, eur goabren dirag e zaoulagad, a goll e hardiegez, hag a zeu da vagan ar sonj n'eman ket marteze ar wirione gantan. Dindan ar poaniou a samm d'ean e galon, e chom an den abafet, ha dirag e stad a vizer, e teu d'en em c'houlên digantan e-unan hag-en e c'hallfe bean eun Doue madelezus er Barados, pa wêler kement a dru-

(1) Ps. xiii. 4.

builh, a fallagriez hag a boan e-touez an dud war an douar. Warlene e komzen eus se em lizer a C'hoareiz. El lizer-ze e oan tost d'ar wirione, pa zisklerien, dire-bech a gredan, ar rêzon-man : ma savje a-unan ar poaniou a zo dre holl da damall da unan benag da vean digaset anê war an douar, sur mat n'eo ket Doue a damaljent, met an den, rak an den a renk ansav, mar geo leal, n'en deus d'ober peurvuian nemet skei war boull e galon ha lavarout « dre ma fôt », pa goue warnan ar bec'h. An O. Doue, memes gwelet ebarz mellezour ar boan, a chom bepred Doue ar vadelez hag an drugare; etre e zaouarn, ar boan a zo eur *benveg* hag a servij d'ean, ma karomp hen digemer digantan gant doujans, da baean hon fec'hejou ha da gaerât hon ine, hag eul *labourez* eus ar gwellan hag a dastum evidomp hon c'haeran madou evit ar vue-man hag evit ar vue all. Ar boan, hag a zo peg ouzimp, n' he deus diskaret gir ebet eus ar re a zo kizellet war ar bed hag hon deus skrivet war hon lizer da ziskoe e zo eun Doue. Ar c'hontret a zo gwir : deut eo d'hon sikour; ya! en gwirione, an treou holl a zo er bed ha ni gantê, e c'hallomp lavarout eus Doue hon Zad hag hon C'hrouer.

Met breman raktal e ra ma spered ar goulên-man : petra a dleomp intent dre ar giriou : an treou holl a zo er bed ha ni gantê e c'hallomp lavarout eus Doue hon Zad hag hon C'hrouer ? Hag-en ec'h è awalc'h d'imp asanti hon deus bet ar vue digant Doue, e dleomp d'ean an donezon-ze ha netra ken ahendall ? Nann,

n'eo ket awalc'h se, ha ma lavarfemp e vije, e lavar femp eur gaou mat, rag ansav a rafemp na nije Doue-beli nemet eun tammig warnomp ha ni nebeud da blegan dindan e zorn.

Nann, Doue n'eo ket bet awalc'h d'ean tennan anomp hag ar bed eus a netra, e-tuont, ma tale'h ar bed en e sav, ma tale'homp ni da vean eun dra benag, ec'h ê dre mac'h omp dalc'hmat harpet warnan. N'ez eus ket eun dra, memes an disteran, kenkoulz eus an treou speredet evel eus ar re hep spered, kenkoulz eus an treou bueek evel eus ar re hep bue, hag a c'hallfe tremen hepan, hepken amzer eur serr-lagad. Doue an neus krouet ar bed ; met ive derc'hel a ra anean en e sav ha ren a ra anean. Setu aze ar wirione am eus c'hoant vit ar bla da zisplegan em lizer a C'hoareiz evit ho frealzidigez kenkoulz hag evit ho kelennadurez.

Arok displegan ar wirione-ze, lavaromp da gentan n'eo ket hep ezomm siouaz ! e kroger ganti en de a hirie. Kant tra a ziskoe d'imp ec'h eo ret en amzer-man komz anei, rag an dud a zo goakaet mat en he c'henver, evel e-kenver kalz re all, memes tud hag a dleje o fe bean ar gwellan diazeet. Gwejall e oa eleiz a dud (ha pegen nebeud e zo anê hirie) hag a c'hallfe lavarout dioutê ar c'homzou a skrivas Sant Pôl d'an Hebreed (1), da lavarout eo, ec'h ent war hent ar vue « *tanquam invisibilem videns* », evel pa

(1) Heb. xi, 27.

weljent o Doue a-dreuz d'an holl dreou en dro d'ê gant daoulagad o c'horf, goude q'all ket bean gwelet nemet gant daoulagad ar fe. Ar re eta a gerz war roudou o zud koz, ac'h a gant o hent, 'n eur virout bepred dirag o daoulagad hag en eur vagan en o c'halonou ar greden e vent heuilhet eus ar beure, n'eo ket hepken gant lagad Doue, met ive gant e zorn, dorn holl-vadelezus hag holl-c'halloudek war an dro.

Ez-eün d'an toulladig tud kalonek-se, eman an dud dizoue, hag a hop a-bouez o fenn n'ez eus Doue ebet a-us d'imp da gemer preder ouz treou ar bed-man ha na n'hallomp gortoz sikour nemet diouzimp hon unan ! Dirag ar youc'hadennou diskiânt-ze, an dud vai, memes ar re ac'h ê gwriennet mat o fe ennê, a chom difin, evel pa vijent dinerz, ha na gredont ken diskoe a-ziavez ar pezh a gredont e kuz o c'halonou, hag a vev, e gwirione, evel pa lezfe Doue anomp da 'n em dennan war an tamm douar-man peb hini herve e c'hoant pe e c'halloud. Pebez bueig paour ac'h ê o hini ! Hag-en, pa o defe bevet evelse dindan o aon, en em santont didammall hag en peuc'h ? Hag-en e santont en o c'hreiz nerz ha kalon evit mont a-benn d'ar poaniou hadet war o hent hag evit trec'han warnê ?

Ya ! e gwirione, ezomm hon deus da skrivan al lizer-man evit dihuni an dud-se, ha didui o sperejou en eur zisplegan dirag o daoulagad ar wirione-man hag a garg ar galon a levenez : Doue eman dalc'hmat e zaoulagad warnomp : muioc'h aketus c'hoaz en dro d'imp evit hon El mat, Doue a zo ive nesoc'h d'imp

ha gwelloc'h sikour evidomp, rag gantan ha dreizan e vevomp hag e reomp hon holl oberou.

I

Dorn Doue eta a ve kavet en hon bue : ret mat eo kement-se. N'ez eus netra er bed, na ni, na netra eus an treou a zo oc'h ober ar bed, n'eus forz pehini, hag a c'hallfe dere'hel da vean eun dra benag nemet dre ha gant sikour an O. Doue. Perak se ? Oh ! ec'h et da welet sklêr mat.

Perak en deus renket hon spered ansav e zo eun Doue, hag ec'h è ret mat d'eun Doue bean ? Kement-man : ar bed ha kement tra a zo ebarz, ni da gentan, evidomp da vean, dre hon ine hag hon spered, uhel mat dreist an treou all, na n'omp holl nemet treou hep ezomm ; n'eo ket ni hon deus roet bue d'imp hon unan, met hon bue hag ar pezh ec'h omp hon deus bet digant eun all, unan ha n'eo ket bet ret d'ean kaout ar vue digant eun all all, met en deus anei dreizan e unan . . . Met mac'h eo bet ret d'imp kaout galloud eun all evit dont da vean eun dra benag eus a netra e oamp, penoz eta e c'hallfemp chom eun dra benag dreizomp hon-unan ? Ha koulz koude e lavarfet d'in ec'h oc'h en bue aboe devezou ha devezou, blavejou ha blavejou a zo ? Ya ! gwir eo, met se na chench ket hon natur. Hon bue a zo hirie ar pezh a oa ar vunuten gentan hon doa bet anei, rak na hirie nag en de e oamp deut da vean eun dra benag, n'allomp lavarout

nemet eun dra : hon deus bet hon bue digant eun all . . . Ha ma pad ar vue-ze, ec'h è dre ma talc'h Doue da rei ha da adrei anei d'imp hep paouez. Ma teufe eta da dennan diouz dindanomp e zorn holl-c'halloudek, e kouezfemp hag e tizrofemp da netra. Klaskomp, ma keret, eur skeuden da lakât kenver ha kenver gant ar wirione-man : sklêroc'h e vo d'hon spered.

Keit mac'h on o skrivan al lizer-man, eun avel foll a c'houez er-maez, hag a zistag gant froud ha herr an deilhou diwean a oa c'hoaz stag ouz ar boudou. An deilhou distaget a ninj eus an eil tu d'egile. E gwirione, n'eont ket gwell bell, rak n'eo ket dreizê o unan e ninjont, peogwir ec'h int pouneroc'h evit an êr. Ma chomont eur pennadik en êr, ec'h è dre c'houezaden grenv an avel, rag evelse e trec'h nerz an avel war nerz an douar ha poez an deilhen. Met raktal pa ve torret d'ar bar-avel, an deilhen a goue war an douar. Neuze eta, n'eo ket bet awalc'h d'an deilhen, evit chom en êr, kaout ar bar-avel kentan ; ret eo, evit ma talc'ho da ninjal, d'ar bar-avel dere'hel da c'houezan.

Evelse ive e c'hoarve, lakaomp, gant ar mekanikou-dre-dan : an tan, dalc'hmat adneveaet, ha nann an tamm tan kentan, a zo nesaser d'ê evit dere'hel da vont en dro.

Ac'hanta memes tra evit an den : n'eo ket awalc'h d'ean bean bet krouet, evit chom ar pezh ac'h è ; ret eo d'ean, e-tuont, bean adkrouet dalc'hmat hep paouez. Na chomomp en bue nemet dre ma vir Doue

anomp pep momet en bue, ha nann dre nerz ar vue hon deus bet digantan an de mac'h omp bet krouet.

Ha neuze ; ar wirione-ze a zo disklêriet d'imp gant eul lezen-veur eur ar furnez natural, a c'hall peb hini gwelet en dro d'ean pegen gwir ec'h ê : « *Sublata causa, tollitur effectus*, disec'het ar vammen, hag e tisec'hfet ar ster. »

Sklêrijennet gant ar wirione-ze, e c'hallet gwelet, Hon Breudeur Ker, pegement ec'h omp stag ouz Doue, pegen gwir ec'h ê na n'omp netra anomp hon unan ha n'hon deus netra d'imp. Ma teufe Doue da dennan eus dindanomp e zorn a zalc'h anomp en bue, ha na vije ken nemet epad eun tol serr-lagad, e tizrofemp da netra.

E tizrofemp da netra, a lavaran, hen kompren a ret, ha nann e kouezfemp etre divrec'h sklaset ar maro ! Rak an hini a goue dindan falc'h an ankou a ve dispartiet e gorf diouz e ine. An ine na neus ar maro galloud ebet warni : goude ma ve tremenet ar maro, e ve an ine ken beo evel arôk. Eus e du, ar c'horf, ma na ve ket esperniet kement evel an ine, da vihanan na ve ket distrujet gant ar maro. Koll a ra e stumm kentan ; pa neve kollet e ine, na ve ken ennan netra da unani etrede al lodennou, hag e teu, dre-ze, da drei buan e poultr ha ludu ; met kement tra a oa oc'h ober anean a chom eno bepred, met dindan eur form all. Ar maro eta na zistruj ket, na ra nemet dispartian.

Met n'eo ket disparti ar maro a c'hoarvefe ganimp,

ma teufemp da zizrei da netra. Ma vefemp dilezet rik gant Doue, ma teufe da dennan e c'halloud eus dindanomp, ec'h afe da netra hon c'horf hag hon ine, evel pa na vijemp bet biskoaz netra.

Pa ve komprenet se, na ver ket souezet o klevet Hon Salver o lavarout da Santez Catel a Sienn : « Me ac'h ê an hini a zo, ha te an hini na n'ê ket. » Na ver ket ive souezet o klevet lavarout e tleomp kinnig da Zoue hon holl amzer, hon holl sonjou, hon holl oberou, en eur gir, ar pez ac'h omp ; n'hallomp ket kemer evidomp nag eur vunuten nag eur vlêven ha na vefe ket diwar e goust. Hon bue holl eta a dle bean, da viken en e enor, eur c'hantik a veulodi hag a drugare.

Evelse, da vihanan, ne vefomp ket e riskl da dennan lorc'h eus ar pez ac'h omp pe hon deus bet. Oh ! pebez tra diskiant kredi ec'h omp eun dra benag ha lezel hon fenn da vezevenni gant moged an ourgouilh. Ha pa santomp o sevel en hon diabarz ar c'hoant da 'n em ziskoe ha da vean kemeret evit unan benag, raktal adlaromp d'imp hon unan ar c'homzou a skrive Sant Pôl da gristenien Korinth (1) : « Eus petra ta e tennes lorc'h ? Petra a teus ha n'eo ket bet roet d'it ? Ha ma teus bet kement tra a teus, perak tennan lorc'h dioutê evel pa vijent bet d'it a-viskoaz ? »

Evelse ive ne ver ket e riskl da ankouât piou e ver, na da zizrei eneb Doue, evel ma ra kement a dud dall

(1) 1 Cor. iv, 7.

ha diskiant, evit ober o fê warnan, e insulti, toui e hano santel ha mallozi. An dud-se a zo henvel awalc'h ouz eur prenvig-douar o ruzan war an douar ouz troad eun den, hag, evitan da welet e c'hallfe an den gant an disteran finv lakât warnan e votez ha pladan anean, a savje koulzkoude eneb d'ean da skei gantan en e fas komzou pounar ha flemmus! Breman e welomp pegen spontus ha pegen diskiant e vije ze!

Doue a blij d'ean hirr-gortoz; kalz gwelloc'h evidomp ec'h ê, rag e vadelez a zo dreist-muzul; teurevout a ra chilaou kentoc'h mouez e drugare evit mouez e justis, ha tremen hep o c'hastian raktal en o fec'hed ar re a stlabe eneb d'ean o c'homzou a gasoni hag a vilpriz hag en em servij eneb d'ean eus ar madou bet digantan. Gwir eo; met ar sonj eus madelez Doue n'hall ket dont a-benn da herdastum o c'honsians da gousket, rag gwej ha gwej all e ve gwelet kounar santel an O. Doue o kouean war ar pec'her e kreiz e bec'hed. Evelse, da vihanan, ma n'eo ket an anaoudegez vat, ec'h ê an aon e koueo warnê raktal malloz Doue a rei d'ê furat eun tammig ha prenan eun tammig skiant da zizrei diwar an hent fall.

Digoueout a ra, alies awalc'h en hon ilizou, e ve diskoet, livet war ar mogerioù pe kizellet er c'hoat pe er minerez peurvuian hep kalz a ijin, skeuden Doue an Tad dindan trez eun den koz hag enorus, en e zorn eur voull, boull an douar. Ac'hanta, ar skeudennou-ze, evitê da vean pell diouz ar wirione, a ziskoe koulzkoude eun draig benag eus ar pezh ac'h ê Doue

e-kenver ar bed holl hag en hon c'henver. Evel kement tra a zo, ec'h omp ni ive etre e zaouarn, d'ean d'ober ganimp ar seurt a garo. N'ankouaomp ket se, Hon Breudeur Ker, met dalc'homp dirag hon spered pegen bras deveriou hon deus en e genver. Greomp eta eus hon bue ar pezh a lavar d'imp ar skiant vat e tleomp ober ganti: greomp diouti eur c'hantik a c'hloar, a veulodi hag a drugare hep ehan en enor da Zoue.

## II

Met n'eo ket hepken evit tennan anomp eus a netra ha rei d'imp êz da vevan hon bue, e teu Doue da soursial ken tost ouzimp. An Abostol Sant Pôl, en eur brezegen dirag barnerien lez-varn Kêr Athen, a lavare, 'n eur gomz eus Doue (1) « Ennan, emean, ec'h omp eun dra benag; ennan ive ha dreizan e finvomp hag e vevomp. » Hag en gwirione, n'hallomp ober netra, memes an disteran finv, ma na vemp ket sikouret gantan. Ha pa lavaran n'allomp ober netra, e komzan n'eo ket hepken eus an den, met ive eus ar bed holl asambles hag eus pep tra a zo oc'h ober ar bed.

Lennet hoc'h eus bet en Aviel (2), Hon Breudeur Ker, ar gir-man koueet diwar muzelloù Hon Salver: « *Sine me nihil potestis facere*. Hepon n'allfec'h ober mann ebet. » Gwir eo, ar gomz-se Hon Salver an neus lavaret anei diwarbenn ar vue dreist-natur,

(1) Act. xvii, 28.

(2) Joan. xv, 5.

ha war an dachen-ze, e kollfer an amzer o tiskoe pegen gwir ec'h ê, peogwir ar gir *dreist-natur* a zispleg d'hon spered dreizan e-unan ec'h omp eno war eun dachen a-us d'hon natur, dreist nerz hag ijin an natur-den. Met memes 'n eur chom war an dachen elec'h ma c'hall holl nerz hon natur 'n em ziskoe, ar gomz lavaret gant Hon Salver a zo gwir c'hoaz penn-da-benn. Ar C'hrist e-unan an neus prizet rei d'imp da c'houzout ar wirione-ze, dreist-holl evit ar pezh a sell ouz an dud, ouzimp. Er 6<sup>e</sup> pennad eus Aviel Sant Vaze (1), en e brezegen war ar Menez, e lavar : *Quis autem vestrum cogitans potest adjicere ad staturam suam cubitum unam?* Piou anoc'h, emean, a c'hall, gant e holl skiant ha preder, brasât e vent eus eun troatad, unan hepken? » Kreski e vent eus eun troatad? Siouaz! nann, den ebet na zo diboell awalc'h evit kaout sonjou evelse! Ma vijemp lezet anomp hon unan, n'halljemp ket memes hinjan hon biz bihan, nag ober an disteran finv, na kaout eur sonj hepken, na magan eur c'hoant benak.

Marteze e vo kavet souezus o klevet pegen dister ec'h omp dreizomp hon unan. Koulzkoude e kredan na vo souezet nemet ar re na deurvefont ket lakât o spered da envori war ar wirione-ze, hag a zo unan eus ar re sklêran hag êzetan da ziazei. Dalc'het sonj eus ar pezh hon deus lavaret breman souden, Hon Breudeur Ker : n'eo ket dreizomp hon unan eta ec'h omp

(1) Matth., vi, 27.

deut da vean eun dra benag eus a netra. Krouet eta ec'h omp bet; met, e-tuont, n'allfemp ket chom hep dizrei da netra, ma na vefemp ket harpet, hep distokan kammed, war dorn holl-c'halloudek hon C'hrouer.

Ac'hanta petra ac'h ê ober eun dra? Ober eun dra a zo en eur stumm kroui a-nevez : lakaomp hoc'h eus breman eur sonj en ho spered, pe e ret eul labour benag, n'eus forz pegen berr ha neus forz pehini, ac'hanta, pa ho po bet ho sonj pe gret ho labour, e vo eun dra benak muioc'h ebarz ar bed evit na oa arôk. Hag e kredet hoc'h eus bet ar sonj-se ha gret al labour-ze dreizoc'h hoc'h unan? Met penoz c'houi, ha na n'hallet ket chom eun dra benag hep sikour, e c'hallfec'h dreizoc'h hoc'h unan keski ar pezh hoc'h eus? Ze n'hall ket bean. Neuze eta, ma zo lakaet kresk war ho ment, ec'h ê eun all an neus gret se, unan ha na n'eo ket dic'halloud evelomp, unan hag a c'hall perober ar pezh an neus gret, pergroui ar pezh an neus krouet, an O. Doue. Finv ebet, nag ennoc'h nag er bed, na n'hall bean gret na perc'hret hep sikour Doue.

Kompren a ret breman, Hon Breudeur Ker, perak ec'h eo êzet da Zoue anaveout kement tra a dremen er bed ha kement finv pe chanchamant a digoe e peotra, hep na vefe netra hag a c'hallfe chom kuzet d'e lagad ha na vefe ket warnan merk e c'halloud? Gwelet a ret penoz e c'hall gouzout holl sekrejou ar sperejou hag holl c'hoantou ar c'halonou? Mac'h omp anaveet ken reiz gant Doue, ec'h ê dre ma n'hallomp ober netra hepan. Kompren a ret ive da berak e lavarar

na zo netra er bed hag a c'hallfe bean gret hep e urz pe, da vihanan, hep e gouzantamant ? N'eo ket posubl e tremenfe an treou ahendall, peogwir c'hoaz eur wej, n'ez eus ket eun dra, unan hepken, hag a c'hallfe bean gret hep e sikour. Hep se, e vije ret lavarout e c'hallfe Doue rei e sikour hep gouzout d'ean ; met ar sonj-se a zo diskiant, peogwir Doue a zo eur Spered, bepred digor e lagad, hag a wel an holl dreou asambles ha peb hini anè en eur sklerijen skedus ha na n'hall na kreski na koac'han.

Pa ve komprenet eta ervat pegen dister ec'h è ar grouadurien, pegen neseder ive ec'h è sikour Doue evit o disteran labouriou, na gaver ken da lavarout, nemet eun dra marteze : perak e ve lavaret « netra na ve gret hep urz Doue pe hep e gouzantamant », elec'h lavarout hepken : « netra na ve gret hep e urz » ? Peb hini a c'hallfe dustu rei war ze ar respont a zo dleet. Ebarz ar bed, ma kemeromp an dud, al loened hag an treou en eur blokad, e welomp e zo anè daou rumm, dishenvel rik an eil diouz egile evit ar pezh a sell o stumm d'ober eun dra : eus eun tu eman an dud, hag o deus spered ha liberte ; eus an tu all, kement tra a-ziavezh d'an den, hep spered na liberte.

Dre e liberte, an den a c'hall ober ar pezh a blij d'ean ; mont a ra, herve e c'hoant, war ar vad pe war ar fall, ha siouaz ! alies e tro trezek ar fall, hag a ra drouk-impli eus an donezon gaer roet d'ean gant Doue. An O. Doue na harz ket anean d'ober an drouk an neus c'hoant d'ober. Evel ma lavar Bossuet

« Donezonou Doue a zo hep keün » ; ar pezh an neus roet a zo roet, ha biken n'e adkembro. Met, war digare na harz ket ar fall, n'haller ket lavarout eman e volonte troet gant ar fall. 'N em zistruji a rafe hen e-unan, heñ ar berfeksion dreist-muzul hag ar vadelez hep par, ma teufe biken da c'houlen ar fall ; n'hall ket eta hen goulenn. Met a-ziavezh da ze, na zo netra ha na blega ket d'e volonte, kenkouls ar vad holl gret gant an dud evel an holl oberou gret er bed gant an treou hep spered ha hep liberte, hag ac'h è ret d'è mont war an tu a vent boutet.

Gwelomp breman penoz e ren Doue an eil rumm hag egile, hag envoromp an deveriou a ziver evidomp diouz e veli warnomp.

### III

Neuze eta, evel ec'h omp a baouez da lavarout, netra er bed, nag e-touez an treou hep bue nag e-touez al loened, na c'hoarve hep na ve bet goullet ha gret gant Doue. N'omp ket pelloc'h evit en dro d'imp : Setu, ma karet, an amzer vat hag an amzer fall hag a ra kement evit pe eneb madou an douar ; ac'hanta an amzer a zo etre douarn Doue. Dont a ra da vean ar pezh an neus c'hoant da welet anei o vean. Hag-en neuze e vefe difennet sonjal e c'hallfe bean, da vihanan eun tammig benag — ar muzul a garfe Doue — ar pezh hon deus c'hoant ni da welet anei o vean ? N'ankouamp ket hon deus an tu da arruout beteg e



galon ha da c'honid e c'hrasou mat dre ar beden?  
Oh! gouzout a ran, na ren ket treou ar bed n'eus forz penoz; ar c'hontrel eo, peogwir ar Skritur Sakr a lavar d'imp e ren an holl dreou gant poell ha muzul (1). 'N eur groui an treou, en deus gwisket d'ê lezennou; an treou a sent ouz al lezennou-ze, hag hen e-unan a lez anê d'ober al labour merket da beb hini, hep stokañ peurvuian outê na mont eneb d'ê. Gwir eo, ma karje Doue, na nije ket krouet ar bed: na oa ret ebet d'ean hen kroui, nag ive, evel just, al lezennou an neus lakaet ennan, rak n'eo ket mevel dindanê. E-touez an dud, an hini an nefe gret eul lezen, a c'hall, pa gar, pe he dispenn pe droc'han he nerz evit eur pennadig; perag eta e nac'hfemp da Zoue ar memes galloud? Gallout a ra, hep 'n em zislavarout, lakât eun tamm chanchamant ebarz an treou ha krennan rik gwej ha gwej all nerz hini pe hini eus al lezennou an neus hen e-unan savet. Neuze eta ec'h ê sklêr e c'hall, evit diskoe en neus chilaouet ar beden hoc'h eus kaset d'e gaout, rei d'ac'h ar c'hras a c'houlennet, pe ar glao, pe ar sec'hour pe an heol tomm an neus ezomm hoc'h eostou. Spered naturel an den hag e fe en em unan da embann ar wirione-ze. Ha setu perak an Iliz, hag a zo en he doare-bevan harpet war ar spered hag ar fe, he deus savet pedennou publik da c'houlenn digant Doue eun amzer dereat da vadou an douar. De ouel

(1) Sap. xvii, 25.

Sant Mark Avieler, hag epad an tri devez a zo arôk. Iaou an Asension, an Iliz a ro urz d'ober prosesionou evit madou an douar. An tri devez arôk gouel an Asension, endeün, a doug eun hano sklêr dreizan e-unan: gret e ve dioutê deveziou ar *Rogasionou*, da lavarout eo, deveziou ar *Pedennou*.

Gwejall, ar prosesionou-ze a vije heuilhet mat: pep familh, e pep parrouz, a gave d'ei e tlee, evit he mad hag hec'h enor, kas unan benag, kalz pe nebeud, d'ar prosesion. Pebez dudi, e gwirione, ha d'ar spered ha d'an daoulagad, mont war ar maeziou beure mat war lere'h ar prosesionou-ze, hag a zo bet ken alies skeudennet ha livet gant tud a ijin a blij d'ê treou kaer.

Hirie, siouaz! na vent ken heuilhet, koulz lavarout. Perak se? Oh! n'eo ket dre ma na ver ken troet gant madou an douar; hirie e ver stag ouz ar madou-ze gwasoc'h evit biskoaz; n'eo ket ive dre ma na nefe ken a amzer da bleal gantê? Peurvuian e ve kavet amzer, pa ve c'hoant da vont da gemer eur barti blijadur pe d'ober eur valeaden, en eur gir, pa ve c'hoant da ober n'eus forz petra nemet pedi! En eur dremen, lavaromp e vije diskiant klask an digareou-ze, pa n'houlter ket mont d'ar prosesionou-man. Doue ac'h eo ar Mestr bras hag etre e zaouarn eman an douar, an avel, an douar hag an tan. Kaout a ra d'ac'h n'hallfe ket, ma karfe, lakât anoc'h da c'honid pe da goll n'eo ket epriou, met deveziou ha sunveziou, 'n eur rei d'ac'h amzer vat pe amzer fall? Greomp eur sell hepken war

an eost diwean : al labourerien a lavare holl en nevoa gret an heol an hanter eus o labour. Gant an hanter eus ar boan o dije bet renket kemer, ma vije bet fall an amzer, o deus gallet klenkan hag o foen hag oc'h ed kalz buanoc'h ha gwelloc'h e kement feson a zo. Nann, n'eo ket dre fôt a amzer na deuer ket da brosesionou ar Rogasionou, met hepken dre aon d'en-em ziskoe evel kristenien vat : gwall vihan ha gwall dinerz ec'h ê arru glaouen tan ar fe e kalon mibien ar Vretoned koz. Ha koulz koude hon zud koz o deus roet d'imp skouer eur fe start, dispont ha birvidik : na vije nemet eur sonj en o spered, e oant holl, hag o zreou gantê, etre daouarn Doue hag o devoa ezomm, ezomm bras eus e sikour.

O mibien, siouaz ! o deus ruzet tamm ha tamm diwar hent ar fe virvidik, hag e sonj gantê en deus an O. Doue treou all d'ober istoc'h evit kemer preder ouz maou an douar ha, dre-ze, na dalv ket ar boan goulenn digantan teurel evez warnê. Setu aze ar pezh a zo e kuz o c'halonou, rak ma na sonjfant ket se, hag-en na ziredfent ket gant hast d'ar prosesionou-ze, evel e tire-dont da gement bodadeg a ve gret da gomz d'ê eus gwellât o stad ? Ma na sonjfant ket se, pa ve gwelet ar glao o pad eur pennad brao a amzer, an ed o vreinan war droad, hag an eost holl o vont da goll, pe c'hoaz pa ve re-sec'h an amzer, ha pa ve rostet gant an heol an douarou hag an trevajou, e vijent gwelet o stoui d'an daoulin dirak Doue hag ober d'ean, dre ha gant an Iliz, eur beden galonek. Met elec'h pedi, petra

a welet anê oc'h ober ? Krial, klemm, ober trouz, ya sur, met pedi ? oh ! nann, vel just ; na sonjont ket hen ober ! Evel pa o dije kollet evit mat diouz o spered ar sonj o deus bepred unan hag a c'hallont kemer warnan harp en o gwalleuriou, an O. Doue.

Siouaz ! bean zo ha na n'eo ket awalc'h d'ê klemm ha hirvoudi. Pa ve d'ober pedi Doue, goulenn e c'brasou ha dousât e gounar santel, ec'h ankouaont pe n'anaveont ket anean ; met kavout a reont anean, pac'h a fall an treou, evit 'n em gemer outan ha stlapan gantan leiou spontus eneb d'e Providans hag eneb d'ean, giriou ponnar hag a laka ar gristenien da urusan, dre ma c'hallfant chachan raktal war bennou ar re a losk anê, malloz ha kounar Doue.

Diwallet, Hon Breudeur Ker, d'ober evel an dud-se ; n'et ket da zislavarout ho kwad kristen, ha peogwir ec'h ansavet ken alies n'hoc'h eus ket a c'halloud war an amzer, n'ankouaet ket, da vihanan, e zo unan benag, ho Toue, hag an neus ar galloud-se, hag hoc'h eus c'houi, dre ho peden, beli warnan. Kemeret eta gant preder hoc'h interest gwirion ; et da gaout anean, pedet ha lakaet pedi anean, pedet asambles gant an Iliz.

N'ho pet ket a aon da vean digemeret fall. Lennet hoc'h eus ar giriou-man koueet diwar bluen eur barz :

D'al lapoused bihan, e re o zammik boed ;  
E vadelez a wisk pep traig eus ar bed.

Ar barz, marvat, an neus c'hoantaet rei d'imp eun

hekleo eus an Aviel, eus ar brezegen war ar Menez, elec'h ma lavar Hon Salver, diwarbenn an dilhad hag ar boed, diwall da vean re nec'het gantê (1) : « Sellet eta ouz an evned en bolz an nenv : hag-en e vent gwelet o hadan hag oc'h eostan ? hag-en o deus grignellou da zastum o madou ? Koulz Koude netra na vank d'ê, rag o Zad hag a zo en nenv an neus kemeret harg da vagan anê » . . . « Sellet breman ouz lilien ar parkou : na labour ket, na nez ket, ha koulz Koude pegen kaer ec'h ê kempennet ! Ar Roue Salomon, e kreiz e c'hloar, na n'eo bet biskoaz gwisket evelti ! » . . . « Perak eta e tiskoeet bean ken nec'het ? Ho Toue a c'houve awalc'h hoc'h eus ezomm eus an holl dreouze ; bean ho po anê digantan ; hag-en n'hoc'h eus ket muioc'h a dalvoudegez evit al lili hag an evned ? »

Koulz Koude, Hon Breudeur Ker, hen ansav a renker ober, pa ve teulet plê ouz ar vue pemdeiek e-touez an dud, Doue, a larfe an den, n'eo ket muioc'h madelezus e-kenver<sup>1)</sup> ar re n'anaveont ket anean pe a valloz warnan hed an de. Gwir eo, met Doue na n'eo ket bet c'hoant en em stagfemp outan evit kaout madou ar bed-man, ha kement-se a vije c'hoarveet, ma nije roet anê d'e vignoned. Ha setu perak ive, evel ma c'haller diski diwar muzellou Hon Salver e-unan en e brezegen war ar Menez (2), an O. Doue a ro e heol tomm kenkoulz d'ar re fall evel d'ar re vat, hag e c'hlaou d'ar re injust kenkoulz ha d'ar re just.

(1) Matth. vi, 26 et ss.

(2) Matt. v, 45.

*1) ar re a bed hag a serjiz anean evit e  
kenver...*

Ma ra ze, n'eo ket hep abeg, met evit gwelet sklêr perak e ra kement-se, ec'h eo ret sevel an daoulagad a-us d'an douar ha d'ar bed-man. An dud, ha na welont netra e tu all da c'hleun ar maro, a ve poaniet ha kounaret o welet an neus ar re fall kement a ehans hag an dud vat. Ankouât a reont n'eo ket er vue-man e ve kastiet ar fall ha dic'haouet ar vad ; na n'ouzont ken ec'h omp war an douar evit dastum meritou benn ar vue all, met evit bean kurunet gant an O. Doue en e Varadoz, ec'h eo ret d'imp, da lavarout Sant-Pôl (1), bean gret brezel ha bean trec'het enni ; met n'haller ket kaout an trec'h er brezel hep tremen dre ar boan hag an drubuilh.

David a ansav ouzimp, en unan eus e Psalmou (2) e oa bet ive entanet e galon gant ar memes sonjou fall hag an dud-se, pa welas pegen mat ec'h e an treou gant an dud dizoue ; met eun devez, Doue a zigoras d'ean e zaoulagad hag e komprenas raktal. Chilaouet anean : eun dudi d'ar skouarn ha d'ar spered ac'h ê klevet ar c'homzou-man : « Ma zreid a oa o vont da vankout d'in, ha ma diwar da veran eus dindanon, dre am eus douget anvi d'an dud fall, p'am eus gwelet anê, pec'herien evel mac'h int, evurus e-kreiz ar peuc'h. Beteg ar maro a ankoua anê, hag an droukehans, pa briz tremen, na ra nemet stokan outê. N'anaveont ket ar poaniou a flastr an dud all war an douar, ha, dre-

(1) II Tim. ii, 5.

(2) Ps. LXXII.

ze, ezen an ourgouilh a zo savet d'o fennou hag o deus evel gwisket war o zechou fall mantel an displealded. Digoret o deus o geno da zisionkan malloziou eneb Doue hag o zeod an neus skubet ar bed holl. Kement se an eus goneet ma fobl a zo et eus o zu, 'n eul lavarout : Nann, n'hall ket eun Doue bean a-us d'imp hag a welfe ar pez a dremen ; sellet ouz ar bec'herien : evurus int ha na vank netra d'è war an douar. Eu gwirione ! Petra a dalv d'in bean maget ma c'halou gant lealded ha madelez, ha gwalc'het ma daouarn e-touez ar re n'o deus biskoaz mastaret o ine, peogwit e tigoas d'in bean trubuilhet hed an de, ha gouzanv poan-spered adalek ar beure. » Pebez myster, ha peged diaes da gompren ! « Met, en eur envori ma sonjou, e tigoas d'in mont d'an Templ, hag eno, Doue a roas d'in d'a gompren pebez fin a vo o hini ! » Pebez fin o devo ! Ya ! setu ar pez a laka eur sklerijen skedus war dreou ar bed-man, hag a led ar peuc'h war ar sperejou, rag an holl a zeu da welet, dre skeuden ar maro, an evurusted dispar a zo miret d'ar re vat, hag ar poaniou spontus a digoe d'ar re fall.

N'houllan ket rei da gredi e c'hortoz dalc'imat justis. Doue beteg de ar maro d'en em ziskoe ; gwej ha gwej all, evit deskadurez an holl, e ro da c'houzout eman eus hon heuilh, da rei d'imp herve hon meritou. An dud fall hag an dud vat o defe, gwej pe wej, eun tanva eus ar pez a vir Doue evité er bed all. Evit ar re vat, e zo bennoziou dudius ha sikouriou kaer hag a ziskoe pegen talvoudek ec'h è kemer harp war e vrec'h. Evit

ar re fall e zo poaniou kri hag a ziskoe pegen diskiant ec'h eo milprizout justis Doue ha mont a-benn d'ei 'n eur ober goap outi. Ar re anoc'h holl n'o deus ket tremenet war hent ar vue, o daoulagad serret, ar re o deus gouveet sellet ha gwelet, a c'hallfe sur mat lakât, dindan hon daoulagad-ni, meur a desteni hag a rafe da c'houzout na dro ket an den e galon en aner war zu Doue, nag ive diwar Doue, memes er bed-man hag evit ar pez a sell ouz madou an douar. Ped n'o dije nemet digas en o spered ar sonj eus kalz a dreou c'hoarveet gantê, ha lavarout gant ar. Roue David (1) : « *Jacta super Dominum curam tuam et ipse te enutriet* ; sko da holl nec'hamant e kalon an O. Doue, hag e rei d'it ar boed a teus ezomm », pe c'hoaz (2) : « *Junior fui, etenim senui, et non vidi justum derelictum, nec semen eius quærens panem*, Bet on yaouank ; breman e zo deut d'in oad, ha biskoaz n'am eus gwelet an den just dilezet, nag e vugale o klask bara. » Me a lavar, ouspenn, da harpan ar c'houzou-man skrivet gant Sant Pôl d'ar Gelted (3) : « *Nolite errare, Deus non irridetur* ; N'et ket d'en em dromplan ; Doue na ve ket gret goap anean », hag e lavaran eta ar pez na n'hall ket an dud diskiant o skiant-prenan : ma na goue ket pouneroc'h hag aliesoc'h dorn Doue war e enebourien, ec'h è dre ma zo

(1) Ps. LIV, 23.

(2) Ps. XXXVI, 25.

(3) Gal. VI, 7.

tud hag a gar Doue o pedi anean hag o kinnig d'ean o sacrificiou evit e zic'haoui diouz kasoni ar bec'herien. Evelse an dud fall a ve esperniet dre zoujans evit ar re vat, ha koulzkoude pegement a boan a c'houzany alies ar re man eus peurz an dud fall !

#### IV

Gwelet hon deus eta an avantaj an neus an den, evit ar pezh a sell ouz madou an douar, ma kar mirout en e sonj dalc'hmat eman an treou holl a zo er bed, ar re ve evel ar re hep bue, etre daouarn Doue ha dindan e volonte, ha ma kar mont gant fians d'en em skei etre divrec'h e Broidans, da e'houlen e skoazel hag e c'hrasou. Breman ee'h eo ret d'imp diskoe en deus kement all a avantaj 'n em fiout da Zoue, evel eur bugel etre daouarn e Dad, pa seller ouz e stumm da ren n'eo ket an treou difinv ha hep bue, met an dud hag o deus spered ha liberte.

Hon lavaret hon deus c'hoaz, Hon Breudeur Ker, Doue a denn diouz an treou hag an dud al labour ac'h int douget d'ober dre o natur. D'imp ni, Doue an neus roet al liberte, hag e lez anomp d'ober impli diouti evel ma karomp. Koulzkoude n'et ket da sonjal e lavaran na neus Doue netra da welet er pezh a reomp gant hon liberte; 'n em dromplan a rafec'h. Ret eo d'ean eta kaout beli war hon liberte evel war

an treou all. N'hall ket ober ahendall. Rak ma vije ahendall, e welet petra ac'h arrufemp da lavarout : ni hag a zo ken dister, evel em eus diskleriet uhe-loc'h, ken ma n'hallomp ket dre hon nerz hon unan dont da vean, da chom ha da ober eun dra benag, ni hag evit an treou-ze holl, hon deus ezomm eus Doue, e c'hallfemp gant hon liberte harz anean d'arruout d'ober ar pezh an neus c'hoant er bed ? Hag-en na vije ket se diskiant ? Lavarout se a vije disklerian e vije Doue o sikour anomp da harz anean e-unan da gas da benn e labour ! Kement-se a vefe lakât Doue d'en em zislavarout, na muioc'h na nebeutoc'h ! Fall put, sur mat, e tle bean ar falz-kredennou a ve tennet dioutê treou ken diskiant ! Nann, frouez ha labour hon liberte n'eman ket a-us da c'halloud Doue ! Doue a ren anomp hag a ren ive hon labour holl, hag a lavariou-man : « an den a vag ar menoz, ha Doue a ra e ioul », « an den a vesk, ha Doue hen kas », a zo ennê eur wirione ken sklêr ken ma n'haller ket he nac'h.

Penez lakât an daou dra-ze, hon liberte ha ioul Doue, da gordan asambles ? N'eo ket eun dra ezet kement-se. Aman ar wirione a zo kuset d'imp, ha n'hallfomp nemet divesatoc'h pa vefomp er Baradoz, pa wellfomp Doue fas ouz fas ; kaout an alc'houe hag a zisklerio d'imp penoz e ra e labour. Met ar wirione-ze na neus ket enni hepken skeuden ha tenvalijen.

Doue a lez an den da ober e labour gant liberte, hag evelse, e ro d'ean lec'h da c'honid meritou pe

nann. Daoust hag-en Doue na neus ket kant ha kant tra ezet d'ean da gemer evit harz an den d'ober a-ziavez ar c'hontrel eus ar pezh an neus goure'hemenet en e furnez.

Ar spered naturel hag ar fe a zisk d'imp, an eil hag egile, n'all ket Doue, speredek ha fur evel mac'h eo dreist-muzul, kroui ar bed gant an holl dreou a zo ebarz, hep bean sonjet evit petra e kroue anean, hep kemer ive ar pezh a oa ret evit kas al labour da benn, ha hep lodenni da bep tra ha da beb den e labour, 'n eur gomans dra an hini kentan, dre an den.

Aze e zo, a gredan, eur wirione ha n'eman ket hepken ebarz al levriou, eman ive ebarz ar vue pemdeiek. Marteze n'arruo biken hon spered da zizolo penoz e kas an O. Doue war arôk an den gant e liberte, met ebarz ar vue pemdeiek, hon spered a ziskoe d'imp en em reont asambles.

Goullomp digant ar re o deus gret dija kalz a hent en o bue, hag a zo kustumm da lakât o spered da labourât ha da lenn en o diabarz, hag e larfont hep sac'han : hed hon bue, hag a zo hurr, e c'houzomp ec'h omp bet libr dalc'hamat d'ober eun dra pe da dremen hep hen ober. Den ebet biskoaz na neus gallet harz anomp da c'hoantât tra ma dra en kuz hon c'halonou. Ha koulzkoude, pa dizroomp war zu an amzer dremenet da adwelet ar pezh an neus karget hon bue hag an hent hon deus heuilhet, ec'h e ret d'imp disklêrian n'eo ket ni hon deus gret an hent se,

met eun all an neus digoret anean dirakomp, unan hag a laka an holl dreou da blegan dindan e c'haloud, unan ha, hep mont a-benn d'an treou na d'an dud, a blena an hent dirakê. Ar Skritur Sakr a lavar dioutan (1), e tap eus an eil penn d'egile d'ar bed, hag a ren ar bed holl gant nerz ha douzder war an dro ; hennez eo Doue. A-wejou e ve komzet eus ar « hazard ». Ar gir-ze na zinifi netra. Na n'omp ket et gant hent ar vue, boutet evel tud dall gant ar pezh a zo en dro d'imp, met kaset omp bet warnan gant eur Spered poellek, hag a oar dre just petra an neus c'hoant, beteg ar pal an neus merket da beb hini.

Ma komzan diouzin ma-unan, me na deulan kammed ma sellou war ma bue dremenet hep na ve karget ma daoulagad gant eur sklerijen skedus diwar ar wirione-ze. Ya ! Doue an neus kroget em dorn hag an neus kaset anon alies dre henchou ha n'am oa ket sonjet ennê, dre henchou memes hag am mije bet c'hoant dre dremen hep heuilh anê, met ar gwellan am oa d'ober a oa plegan ha mont war arôk. Doue a well hirroc'h ha gwelloc'h evidomp-ni ; e furnez a zo a-us d'hon speredig diboell... Memes pa denn e c'halv daerou c'houerv diouz hon daoulagad, ec'h eo ret d'imp, pa sellomp, goude tûl, ouz an euriou poanuis ac'h eo bet ret d'imp tremen dreizê, ansav ec'h e skler e lagad, ha bras e vadelez !

(1) Sap. viii. f.

V

N'ouzonn ket petra a santet en ho kalonou, Hon Breudeur Ker, pa sonjet er galloud an eus an O. Doue war ar bed holl ha war bep hini anomp, met d'ann menoz, e tleje ar sonj eus beli Doue warnoc'h lakât da gouean war hoc'h ineou glizen badus ar peuc'h hag al levenez, hag ive eun nerz didrec'h da gerzout a-dreuz ar poaniou a gav an den war hent ar vue, eur galon grenv da drec'han bepred war an holl drubuilhou, hag eur fiars hep muzul hag a lakafe anoc'h da drec'hel da vont, memes 'n eur gerzout war bikou ar boan-gorf hag ar boan-spered, gant hent hon dever pemdeiek, evit mad an ineou ha gloar an O. Doue.

Da gentan ar peuc'h a zeu dreizi hec'h-unan da neizian en kalon an hini a gred en neus Providans an O. Doue beli da viken war ar bed ha war an den. Kompren a ran, e gwirione, e ve nec'het bras an hini na wel ebarz ar bed nemet ar pezh a weler gant daoulagad ar c'horf. Neus forz war be tu e tro, pe war zu an treou, pe war zu al loened, pe war zu an dud, e sant dirakan hag eneb d'ean eun nerz spontus, hag a c'hallfe eus an de d'egile, frikan anean ha dismantran e holl vadou. Evel ma lavar Pascal, ret eo d'ean ansav na n'eo nemet eur blanten dister a elez hag a c'hallfe eun netra he flastran. Ha dreist-holl pa sell war zu an dud eveltan, en neus muioc'h c'hoaz da grenan evit pa sell war zu al loened pe an treou

hep bue ha hep spered. E gwirione, n' hall tamm ebet bean asur, pa sonj en gwarizi an dud, en o fallente, en o spered a valis ha fallakr, hag a c'hall magan eneb e vue sonjou fall... Met petra a raje aon d'an den a c'houve penoz eman an nerz fall a zo dre holl en dro d'ean, dindan beli Doue ha na n'hallfont biken ober drouk d'ean nemet ma kar an O, Doue. « *Dominus illuminatio mea et salus mea, quem timebo?* » (1) An O. Doue ac'h eo ma sklerijen ha ma silvidigez, petra a rei aon d'in? » — « *Dominus protector vitæ mee, a quo trepidabo?* » An Otrou ac'h eo ma skoazel em bue, dirak piou e krenin? » — « *Si consistant adversum me castra, non timebit cor meum;* Ma ve savet armeou eneb d'in, ma c'halon 'a chomo bepred hep spont nag aon. » — « *Si exurgat adversum me prælium, in hoc ego sperabo;* ma teu ma enebourien d'ober d'in brezel, er brezel-ze e kavin mammen ma levenez. » An Abostol a lavare (2) : « *Deus pro nobis, quis contra nos?* Doue a zo a-du ganimp, piou a vo eneb d'imp? » Ar peuc'h a doug eur c'hristen mat en e galon, penoz e c'hallfe dont da vean diasur, peogwir e c'houve eman Doue o ren ar bed holl ha pep tra, e kar Doue anean, ec'h e e Dad, ar gwellan eus an Tadou, eun Tad hag a zo holl-vadelez hag a zo dalc'hmat o klask mad e vugale? Ar peuc'h a zo diazeet mat en e galon, ha na n' hall bean nemet hini

(1) Ps. xxvi.

(2) Rom. v, 31.

ar bugelig o kousket etre divrec'h e vamm. Pebez tenzor !

Da heul ar peuc'h-se e zo eun nerz dispar hag a ra an den ganti hent ezet a-dreuz poaniou ar vue-mian. Sanket doun en ho spered ar wirione-man am eus neve digaset sonj anei : Providans Doue a ren an holl dreou hag a glask hon mad en kement tra a c'hoarve. Sur mat, e sautfet pouezans ar boan, pa goueo ar bec'h anei warnoc'h, met penoz e c'hallfec'h neuze 'n em gemer ouz Doue, pa sonjfec'h ec'h ê dre garante evidoc'h en neus digaset ar boan-ze d'ach ? N'hallfec'h nemet stoui d'an daoulin d'hen adori ha da lavarout a greiz kalon : « fiat ; ra vezo gret ho polante ! » Kaeroc'h e refet : evel an den santel Job, e kavfet en ho kalon an nerz da vinnigan ha da veuli an dorn pounar a wash warnoc'h. Pa c'hoarveas gantan koll e holl vadou, pa digoeas d'ean chom e unan, dilezet, hep netra ken, klanv, ha debret gant al lorgnez, pa renkas, en e goaze war e vern teilh, rozellât, gant eun tamm darboud diwar e groc'hen, an diskargadur a zivere eus e c'houliou, ar Patriarch koz, kaer an nevoa e vignoned hag e wreg boutan anean da vallozi hano Doue, na gavas da respont nemet ar giriou-man : « Ar Mestr bras an neus roet d'in an-treou holl am oa ; ar Mestr bras an neus lemmet anê diganin ; ra vo binniget e Hano Santel (1) »

(1) Job. 1, 21.

Bean a zo kristenien, en de a hirie, hag a bign ken uhel hag an den santel Job, hag uheloc'h c'hoaz marteze, war vene ar vertuiou. Bet am eus, me ma-unan, anaveet eul labourer, ha kentan tra a re, pa c'hoarvee eur gwalleur benag gantan en e vadou, pa digoee d'ean, lakaomp, koll unan eus e loened, a vije mont, da red, da Iliz e barrouz da lakât eun oferen a drugare. Ya ! a drugare ! rak, er gwalleur a gouee war e di, e wele mouze'hoarz Doue deut d'ober e vizit. Kement-se marteze a gavet souezus ? Ha koulzkoude na zo eno netra nemet herve an urz ! Pa ve eur fe wirion, e tiskoeer. evel an den-ze, eun nerz burzudus e kreiz an droukchans ; goullet digantan e fe, hag ho po ive e nerz-kalon.

Hag-en em eus ezomm da lavarout n'ho pige ket a geun o vagan en ho kreiz eur fe ken kreñv ha hini an den-ze, memes ma wellfec'h an treou en dro d'ac'h gant ho perr-welet a zen. Istor Job a gont d'imp penoz Doue, trec'het gant pasianted an den Santel, a iac'haas anean, hag, e-tuont, a roas d'ean peder gwej muioc'h a vadou evit an nevoa arôk e walleur. Al labourer a gomzen anean, hen ive, goude bean bet gouzanvet devezioù kri, a welas dindan bennoz Doue ar chans o tont da lojan dindan e doen hag e vadou o kreski fonnus e kreiz al levenez. Peurvuian, pa nefe roet unan benag eun testenî ken kaer ec'h ê distag e galon diouz madou an douar, an O. Doue na na nefe ken a aon e vefe dizroet gantê diwar vadou ar béd all, ha neuze ê ro anê a vriadou.



N'eo ket hepken en hon madou, pe re hon c'horf pe re hon spered ha re hon c'halon e c'hallomp bean skoet; c'hoaz e c'hallfemp bean skoet, ha ken gwaz all, gant an drubuilh a laka da ziwan en hon spered ar brezel a welomp e ve gret da gement tra vat ac'h e tomm hon c'halon oute : ar justis, ar relijion, ar vro. Eno c'hoaz, pebez nerz-kalon na ro ket eur fe gwriennet mat e Providans an O. Doue. Mar o deus ar fe-ze, na vefont biken diskaret na dinerzet, o welet ar fall o kaout an trec'h eur pennadig. Rak neuze e teu d'ê sonj eus giriou Sant Augustin : « Doue an nije hargaset ar fall e-maez eus ar grouadelez, ma na nije ket bet galloud na madelez awalc'h da drei ar fall en mad. » Dont a ra ive sonj d'ê eus gir ar Roue David en e Psalmou (1) : « Doue na lezo ket dalc'h-mat gwialen ar bec'herien da roudenni kein an dud just. » Gouzout a reont na n'eo an dud nemet benviou, koulz lavarout, etre e zaouarn, ha, pan nefe gret an dud fall o labour, e vruzun anê evel eun tamm gwer. Ar sonj-se a gennerzo anê, ha netra n'halla biken diskar anê; dere'hel a refont da vrezelian evit ma trec'ho ar vad, sur evel mac'h int e teuio eun devez, pell c'hoaz marteze, met forz a zo ? hag ar pez a vo bet gret evit dismantran an Iliz hag an ineou, a servijo da sevel anê uheloc'h e kreiz ar gloar. Pet gwej n'hon deus ket gwelet se war douar Frans; peb hini anomp a c'hallfe digas ouspenn eur skouer da harpan ma

(1) Ps cxxiv, 3.

lavar : ... Ha c'hoaz e welfomp ar memes tra. Pell diouz ma spered sonjal ober ma frotet; met hag-en, adaleg vremen, na welomp ket dija e-touez daouarn ar bolitikerien, armou a vrezel hag a dlee diwadan an Iliz beteg an daken diwean, o vont da gouean diouz tre o daouarn hag o tont a nebeudou da greski ar vad a dleent mougan ?

Oberour an O. Doue na dleje biken anaveout an euriou a ziskouraj hag a dristidigez, peogwir e c'houve e vo bepred skoaziet e volonte dinerz gant dorn holl-c'halloudek an hini eman en e servij.

Lavaromp c'hoaz diwarbenn ar fe a dleomp kaout e Providans an O. Doue na n'hall ket tremen hep rei eur fiars hep muzul d'ar re o deus ar fe-ze, pa'n em gavont dirag al labour gourc'hemennet gant an dever, pe dirag an oberou savet da frealzi poaniou an dud, konforti an ineou ha gonid gloar da Zoue. Lavaret e so bet eus ar gir « impossible » n'eo ket gallek : evit ar pez a zo sur, kristen na n'eo ket. Perak na adlavarfemp ket aman ar gomz a lavaras Hon Salver da dad eun den yaouank a gouee en drouk-sant. An tad a c'houlle digant Jezus iac'hât e vogel. « *Omnia possibilia sunt credenti* », (1) eme Jezus, hag e c'haller trei ar giriou-ze e brezoneg evelhen : « D'an neb a gred e Providans an O. Doue, na zo netra imposubl. » E gwirione, gant nerz ar fe, e ve gret an treou diesan, memes ar re a larfer e vefe

(1) Marc ix, 22.

diskiant kontant warnê. Pebez istor dudius ha burzudus an hini a gont d'imp an oberou gret gant ar fe-ze ! C'hoant am mije da lenn d'ac'h eur bajen gaer eus lizer Sant Pôl d'an Hebreed (2). Sant Pôl a gomz d'imp eus hiniennou ar burzudou gret, gras d'o fe, gant sent an Testamant koz, eus adalek Abel betek merzerien ar Judevien 'n eur dremen dre Noe, Abraham, Izaac, Jacob, Joseph ha Moyzes. Re hurr e vije siouaz ! komz eus an holl dreou-ze, ha n'oullan ket hurrât re al lizer-man !

Met lennet ar bajen-ze : pebez skoueriou a lakao dindan ho taoulagad ! Ac'hanta an Ebestel o deus gret kenkoulz ha gwelloc'h marteze ! Pebez fians en O. Doue n'an deus ket bet ezomm an daouzek denig-se, ha n'o devoa netra eus peurz madou an douar, evit mont hep aon, evel o deus gret, da c'honid ar bed holl d'an O. Doue ! Ar memes fians a welomp e Genovefa : ar santez-man a zivall Paris diouz ar gernez hag a soveta kêr ! Ar memes fians c'hoaz a welomp e Santez Janed a Ark ; ar plac'hig-man, hep gouzout netra eus ijin ha gwiziegez mistri bras ar brezel, a drec'h war armeou galloudus Bro-Saoz ; biskoaz kement all na zo bet gwelet er bed ! Ar memes fians a welomp ive e Sant Visant a Bôl ; an den-man, izel a galon, a gav pareans an holl vizeriou en e amzer ; ober a ra treou ha n'eus forz pesort gouarnamant, en de hirie, evitê da gaout eleiz a arc'hant hag a dud, a vije ret d'ean ansav bean re

(2) Hebr. xi.

dister d'ober ! Ar memes fians a welomp en eur beleg, izel a galon ive, hag eur plac'hig yaouank, en eun Eskopti en hon c'hichen, bean zo breman tri-ugent vla, pa savjont ar Vreuriez-ze gret anei Breuriez Seurezed vihan ar Beorien. Al leanezed-man, e kement bro a zo dindan an heol, a zigemer, ebarz tie bras eus an talvoudekan, milherou ha milherou a dud koz dilezet. N'o deus gwenneg dastumet ebet, tamm bara paeet ebet ; kontan a reont war galon vat an dud. Ac'hanta kavout a reont an tu da vevan o zud koz ha da lakât war o deiou diwean mouze'hoarz al levenez ! Ah ! mac'h eus c'hoant da gemer eur gentel a fians en Providans Doue, prenet Bue an Tad Lelièvre, en galleg, gant an O. Baunard. Ar vue-ze eman enni istor diaze an tie kentan ; gwelet a rafec'h, en eur lenn, hag-en an hini en em westl da serviji an dud paour hag ezommek a c'hall kontan war Doue, hag-en Doue e-unan na zeu ket da vean e servijer !

N'eus ket c'hoaz pell, e adlennen bue Diazeourez Leanezed Gwir-Sikour ar Purgator, maro er blavez 1874 ; he Breuriez he deus kemeret karg, evit dudi ha frealzedigez an ineou poaniet, eus an holl oberou a garante a sell ouz ar vugale vihan hag an dud siet. Pac'h eas evit ar wej kentan da gaout Arc'heskob Paris, da gomz d'ean eus ar pez a oa e sell d'ober, an Arc'heskob a c'houllas diganti : « Ha bean hoc'h eus eun ti ? » — « N'am eus ket, emei, Otro 'n Eskob. » — « Petra a refet eta ? » — « Otrou 'n Eskob, emei, hag-en e vije souezus o

welet Providans an O. Doue o kavout evidomp eun ti diwar an holl die a zo e Paris hag a zo d'ean? » An ti na vankas ket d'ei; dont a reas da gaout anean eus al lec'h na sonje biken e vije deut. Doue a zic'haoue he fe virvidik. N'eo ket hepken neuze, met ive goude alies Doue a zeuas d'he sikour, ken ma renk an den lavarout 'n eur welet se: « en gwirione, dorn Doue a zo aman, *Digitus Dei est hic.* »

Gwir eo, eviti evel evit e servijerien, Doue na n'eus ket gret e-unan ar pezh a oa d'ober. N'eman ket en e gustumm espern e boan d'an den gant aon ma krogfe warnan al leziregez ha ma teufe da goll ar muzul en e c'houlennou. Mat eo bepred mirout sonj, pa ve goullet sikour Doue, eus respont Hon Salver d'an diaoul, pa bede heman anean, war digare e harzfe an Ele anean da gouean, d'en em skei en traon diwar garidou an Templ (1): « *Non tentabis Dominum Deum tuum*, na denti ket Doue da Vestr. » Mat eo ive derc'hel bepred sonj eus ar c'hrenn-lavar: « 'n em sikour, ha Doue da sikouro. » Met an hini a ra eus e wellan da gas da benn al labour a zo merket d'ean gant e zever pemdeiek, a c'hall kaout fians: an O. Doue na vanko ket d'ean. Testeni eus se a c'hallfemp kaout digant an tadou hag ar mammou a familhez ken kalonek hag a zo c'hoaz kalz anè en hon Eskopti, tud a boan peurvuian hag o deus, dindan o zoen en dro d'è, dek, daouzek, bete pemzek a vugale.

(1) S. Luc, iv, 12.

Holl e c'hallfemp lavarout ar c'homzou kaer man am oa klevet me ma-unan eus genou-unan anè, eun nebeud a zunvezioù goude em oa gret ma lizer da c'houlenn digant an dud sikour o fedennou hag o yale'h evit ar c'hloerdi neve. An daou den yaouank a oa et en o menaj e-kreiz an dienez: an noz kentan eus o eured, a wreg hag an ozac'h yaouank, pa lakajont asambles an arc'hant a oa warnè, a gavas ugent real! Ar vicher a rent a oa unan eus ar micherious-ze war ar maez hag a zo bet eur pennad brao ha na veve ket ar micherour nemet gant poan diwarni. An de ma tremenis, e oa dija eno pemzek a vugale, hag ar c'hwezket war vean: — « Bet hoc'h eus marvat devezioù trist ha poanous? » e c'houlenn digant an tad. — « Ya! emean », ha dustu e troas ar gôz: — Ec'h oc'h emean, O 'n Eskob, o c'houlenn arc'hant evit ho kloerdi; ha kaout a ra d'ach, en amzer man n'hoc'h eus ket gret eun akt ar fe gwell gaer e Providans an O. Doue, 'n em risklan d'ober eur c'hloerdi? Ac'hanta, pep gwej pa hon deus digaset, ma gwreg ha me, eur men neve da sevel hon menaj, hag e voe barz arc'hoaz c'houezek a vugale, hon deus gret, ni ive, eun akt ar fe e Providans-Doue. Ret eo d'in hen ansav: ma fe n'eo bet biskoaz tromplet; biskoaz ar Brovidans n'eo bet manket d'imp. Goulenn a ran diganti ajistan anoc'h evel he deus ajistet anon. — E beden a zo bet chilaouet: ar c'hloerdi neve a zo war achui; benn eun nebeud a vizioù e vo gallet, evit klozan al labourioù, konsakri ar chapel.

Evel an tad a familh, mac'h eo ret d'imp lavarout : bet e zo devezioù start, e renkomp lavarout dustu goude : Providans an O. Doue na n'eo bet biskoaz manket d'in. Tremenet hon deus dre lec'h ma zo bet tremenet milherou ha milionou a gristenien vat aròk d'imp... Pegen dous ha pegen frealzus ec'h eo kement-se !

\* \* \*

Ah ! Hon Breudeur Ker, pegoulz eta ec'h arrufomp da welet, evel gant hon daoulagad, pegen bras ec'h eo an tenzorioù a laka hon fe gristen hed hon brec'h diouzimp ? Pegoulz eta e teurvesomp skrivan anè en hon bue ? Pebez chanchamant a vije enni neuze ! Gwelet hoc'h eus, eur wej benak, mar goc'h bet o vale beteg meneou an *Alpes* pe ar *Pyrenées*, meneioù uhel ha kaer, e kreiz ar meneioù all, evel ramsed e-touez an dud. O c'hriben, goloet a erc'h, ac'h a d'en em goll en bolz an nenvou. Izeloc'h, ouz o c'hoste, e c'haller a-wejou gwelet ar c'houmoul o 'n em dastum ; prestik goude, an arne a zo en gor, ar c'hurun a zeu da strakal, ar glao a goue a-bil war goste ar meneioù hag an douar 'n em dastum d'ober rinvierou foll a ziskenn gant froud beteg an traon 'n eur dismantran kement tra a gavont da stourm outè. E keit-se, o c'hriben a zo en peuc'h ha sioul, beuet e sklerijen skedus an heol a denn diouz pep greunen erc'h ha pep beg nadoz skorn eur mouze'hoarz hag eur steredennig.

An den a gred ferm ec'h è renet ar bed hag an dud gant Providans Doue hag en em lez da vont da heul e volante, a zo henvel ouz ar meneioù bras ze. Koumoul a c'hall 'n em dastum en e zevezioù, arné a c'hall strakal ha barriou-avel spontus dirollan ha kas gantè tra pe dra eus e vadou, e vrud, e galon bruzunet, met e benn a zo uhel mat ebarz an nenv, elec'h ma n'hall ket tapout an treou a dremen ; beuet è e kreiz sklerijen d'udius heol Doue hag a denn eur mouze'hoarz diouz peb hini eus e sonjou. Netra na zo a-us d'ean, hag hen a zo a-us d'an holl dreou, rag eman e kichen an O. Doue hag a ro d'ean eun tam-mig lod en e beuc'h hag en e rouantelez.

Na gav ket d'ac'h e zo e kement-se eun dra benak kaer awalc'h da vean c'hoantaet ? Ac'hanta an dra-ze, hoc'h eus anean e kichen ho torn ; pa garfet, n'hoc'h eus nemet astenn ho prec'h da gaout anean : kerzet war hent ar vue, ho taoulagad troet gant karante war an Hini a zalc'h en e zorn hag a ren ar bed holl, hag a gar anoc'h, hag e santfet ar vadelez dispar a zo kuzet en dra-ze. Kavet ho po an alc'houe a rei disken, koulz lavarout, diouz ar Baradoz ar peuc'h hag an evurusted war an douar.

SETU PERAK :

Goude bean pedet an Otro Doue,  
Ha 'n em glewet gant Otrone Chaloned Iliz-Veur  
Katedral Sant-Brieg,

Hon deus gourc'hemennet hag e c'houre'hemennomp ar pezh a zo aman warlerc'h :

#### ARTIKL I

Digas a reomp da sonj d'ar gristenien, eo gourc'hemennet gant an Iliz da gement hini a zo eur bla war-n-ugent achu ha n'eo ket c'hoaz krog en tri-ugent vla, iun bemde, nemet da zul, e-pad ar C'Hoareiz ; ha, da gement hini a zo seiz vla achu, ober vijel : de Verc'her-ar-Meur ; peb gwener ha peb sadorn, e-pad ar C'Hoareiz ; ha, gant an Daouzek-Deio, da verc'her, da wener ha da sadorn.

#### ARTIKL II

Koulskoude, gant permission Hon Tad Santel ar Pab, roet an 22 a viz C'houever 1922, e vo groet en Eskopti vijel d'ar merc'her elec'h d'ar sadorn e-pad ar C'Hoareiz.

#### ARTIKL III

Gallout a c'heller dibri kig de Iaou-C'hembfid ; ha, da Sadorn-Fask, adaleg kreiste, e vo achu da iun ha da vijel ar C'Hoareiz.

#### ARTIKL IV

E-mañ ar C'Hoareiz e zo vijel kuit a iun, peb gwener ; iun ha vijel en de diarog ar pevar gouel bras-man : gouel ar Pentekost, gouel ar Werc'hez Hanter-Eost, gouel an Oll-Sent ha gouel an Nedeleg.  
Koulskoude, herve ar c'hustum aboe gwejjall amzer-

en hon Eskopti na vo na iun na vijel de sadorn ar Pentekost, nag ive de 'rôk gouel ar Werc'hez Hanter-Eost dre bermision Hon Tad Santel ar Pab.

#### ARTIKL V

N'eo ket difennet dibri e-pad ar C'Hoareiz kig ha pesked d'ar pred.

E-kevez ar C'Hoareiz, e c'heller ive dibri uo, de Wener ar Groaz zoken.

Ar re 'zo dleet d'e iun, n'allont, en deio iun, dibri uo nemet d'eur pred hepken.

Gallout a c'heller implian bemde leaz hag amann gand ar pred bihanan zoken.

Gallout a rer implian bloneg ha zoa d'ober souben ha da ôzan boed, en deio iun ha vijel, koulz en tri de diwean euz ar Zun Santel hag en amzer-all.

#### ARTIKL VI

An Otrone Personed, beleien ar c'houencho hag ar c'hovezour, a roio brasoc'h dispans c'hoaz, mar be ret, d'ar re a c'houlenn digante.

Kelenn a refoint start ar gristenien da ziwall ouz an evaj hag ouz ar vèventi ; rag an tech fall-ze a zo, evel eur gwall walen, o waskan hon bro.

#### ARTIKL VII

An Otrone Personed a alio ar gristenien da gomunian gant Pask peb hini en e Iliz-parrouz ; neb an nije groet e-lec'h-all e gomunion-bask a dle hen rei da c'hout d'e Berson.

An Amzer Bask a zigoro ar bevaret seul eus ar C'Hoareiz, hag a glozo d'an eil sul goude sul Fask.

Ar vartoloded, a ia da besketa da bell bro, a c'hallo ober o fask adaleg miz C'houever.

#### ARTIKL VIII

Alian a reomp ar Bastored da zarmon diou wech ar zun, e-pad an C'Hoareiz, ha d'ober Hent ar Groaz da wener. Goude, e vo gallet rei Salud ar Zakramant.

#### ARTIKL IX

Pidi a reomp ar gristenien da ren bue santel, da vean devot d'an ofiso, da zont d'ar zarmonio, da ziwall eus ar pec'hed, da laret ar pedenno, en o zi ; ha, da rei *Aluzen ar C'Hoareiz*, peb hini herve e zanve.

Astenn a reomp an dorn da c'houlten, en han' Doue, an aluzen-ze digant holl gristenien an Eskopti ; rag, mac'h eo dleet en peb amzer ober aluzen, koulz a ve, neb an neus peadra, a renk ober anei gant mui a volonte vad c'hoaz.

N'eus forz pegen bihan e ve aluzen ar paour, tenna ra, war-n-an ha war e di, bennoz an Otro Doue.

#### ARTIKL X

Aluzen ar C'Hoareiz a vo roet en o dorn d'an Otrone Personed pe da veleien ar c'houencho. Mad e koulskoude lakat e-barz an Iliz eur c'hof market warnan : *Aluzen ar C'Hoareiz*, evit digemer arc'hant ar re e ve dies d'e hen kas d'an Otro Person.

#### ARTIKL XI

Pidi a reomp ar gristenien da rei, peb hini muiian ma c'hallo, evit ar Seminerio, evit ar Skolio kristen hag evit Diner ar relijion.

Fournis d'ar Seminerio ar pez o deus ezom, ha, muioc'h c'hoaz, sevel eur Seminer nevez, a zo daou dra a n'eont ket hep damant na poan-spered.

Kontan a reomp war largentez ar gristenien da zikour anomp da gas da-benn an obero mad se a zo ret d'erc'hel evit sevel ha diski ar re a zo galvet da vont da veleien.

Koulz all, hep ar Skolio kristen, hen gout a ret, n'eus ket relijion gant deskadurez ar vugale, hag ar fe hec'h-unan a ia da goll.

Ret eo, kousto da gousto, mirout ane.

Diner ar relijion a zo evit zikour ar veleien n'o deus ken paë ebet digant ar gouarnamant ; anez an aluzen-ze, na voint ket evit bevan ; ha gant-se, eo dleet da bep kristen rei anei, herve e c'halloud, ha dindan boan a bec'hed.

#### ARTIKL XII

De Sul ar Rouane, e vo gret ar gest evit ar Sklaved ; kest Gwener ar Groaz a vo, herve bolonte Hon Tad Santel ar Pab, evit an Douar-Santel ; hini sul ar Beuz, evit ar bevien glanv ha diremet 'zo en Hospital Sant-Brieg ; hini gouel an Ebestel sant Per ha sant Pol, evit Diner Sant-Per ; hini zul ar Rozera evit ar skoliou kristen ; hini an eil sul a viz du, evit an ilizo paour eus hon Eskopti ; hini an eil sul eus an Avant, evit ar zoudarded hag ar Yaouankiz kristen.

Ar sul diwean a viz Genver ha de ouel an Asan-  
sion, e vo kestet evit ar Skol-vraz hanvet en galleg :  
*Université Catholique.*

### ARTIKL XIII

Pa zigoco unan-benag eus ar c'hesto-man, pe ar  
gest evit ar Seminerio, e vo roet da c'hout d'an dud  
adaleg ar sul arog, en pron an oferen-bred, hag an  
arc'hant a vo digaset d'an Eskopti.

Pep kest a renker ober anei en holl oferinio hag  
ofiso.

Al lizer-man, gant gourc'hemenno ar C'Hoareiz, a vo  
lennet en pron an oferen bred, en holl ilizo ha chapello  
an Eskopti, ar sul warlerc'h ma vo arru.

Roet en Sant-Brieg, dindan on zin, on ziel, ha zin  
Sekretour Braz on Eskopti, an 12 a viz c'hoevrer 1929.



† FRANÇOIS-JEAN-MARIE,  
*Eskop Sant-Brieg ha Landreger.*

Dre urz an Otro n-Eskop :

P. ROSE,  
*Chaloni, Sekretour Braz.*